

1873-025

KANTIKOU

PABREZ BENODET

1873

LEUE MISSIONER PERIZAD



Imon Van'ed' sup'm' med' ordom'

KANTIK ITRON VARIA BENODET

Yezhañ Itron Varia an Porzou

Diskad

*Itron Varia Benodet
Sellit ouz ho guel
A heb ur omp d'ant-
sho kuel
Mamm, En lan Doue
Hil*

Mit diskuez d'oc'h ho harante,
Hon tud-koz, Gwerchez santel,
Roaz-aman d'oc'h lede,
Kneri-houn euz Breiz-Izel.

Eun dud ez eo da velet,
Hoc'h-hilz, Mamm-doue ha mad,
Demostrik d'ar mor-fuloret,
En dro del-mantel an c'hoad.

E-oharz he-zreid eo dirollet,
Ar-ster-vel euz zezen-yaas,
Gant an-treizou steredennet,
Krouz-hag-en-noz an-oubl-glaz.

Eannh n'ho-peuz ket ehanet,
Hed korden an c'han-trejou,
Da-vei siloun d'an den-ponnat,
Daz-zeñon de burvidour.

Morse-ne-c'hellat mi-veit,
An-dud-paon-ber-patei,
Euz an-c'hreuz, Gwerchez-Varia,
An-droug-penn ar-joan-spered.

Evelse heb-hilz-ve-guellet,
Da-zul-kenta-Guengolo,
A-hep-koste-peñned,
O-tredet-tro-vant-dro.

An-straoudeñon-roum-digasseta,
Ama-gant-ar-glan-vourien,
A-ziskuez-oc'ho-bes-selaonet,
Gant-mad-deiz-ho-teden.

Hrio-ave, Mamm-benniget,
N'ea-promet-d'oc'h-d'hon-tro,
Ne-vezo-morse-dilezet,
Hoc'h-hilzou-en-hon-bre.

En-desped-d'an-tud-diskaled,
Ato-ano-ho-panisk,
Digallat-karet-behoaret,
A-uz-douar-Breiz-Izel.

Ar-c'hoagad-vo-stand-martrezo,
An-dud-fall-ze-kounaret,
Mez-slonzet-gant-Mamm-Doue,
Eiken-ve-zimp-trec-het.

Ha-goude-m'hon-d'o-tremenet,
An-droug-aman-n-zaelou,
Doue-penn-d'hon-digereñ,
En-ho-hilzou-an-Envoue.

E-no-vedad-an-holl-amzer,
Unanet-gant-Hon-Doue,
Hon-levaez-vevo, Mamm-dener,
Diskuez-d'oc'h-hor-c'harante.

Yezhañ person ar-barrez (1908)

Kantikou parrez Benodet.

KANTIK EN HENOR D'AR ZAKRAMANT

O Sakra-mant burzu-duz, Leac'h omp ma-get gant
Jezuz ! Ennhan e-ma Hor Zalver ; Kre-di a ran var he

c'her ; Ennhan e-ma Hor Zalver ; Kre-di a ran var he c'her.

Jezuz, d'an noz-kenet mervel,
Ro-galloud d'he Ebestel
Da-jench ar bara, ar guin
N'he-gorf-hag-he-c'hoad-divin.

Ar-veleien, d'ar-gorreou,
A-gonsakr-gant-he-gomzou,
Ha-Jezuz, mestr-braz ar-bed,
Ouz-ho-mouez-a-zent-berped.

Heb-kuitat-he-varadoz,
E-chom-aman-deiz-ha-noz ;
Chom-a-ra-en-hon-touez
Dalc'h-et-gant-he-garantez.

Euz-ar-guin-hag-ar-bara-
Petra-jom ? Ne-jom-ken-tra-
Nemet-ar-spesou-dister
A-guz-korf, goad-Hor-Zalver.

Aman-n'hellomp-ket-koumpren ;
Ar-feiz-hebken-hor-c'helen...
Gant-ar-feiz-sklerijennet,
Ne-fazi-ket-hor-spered.

E-doare-ar-sperejou
Eo-n'em-laket-en-hostiou.
Pa-vez-an-hostiou-torret,
He-gorf-sakr-n'eo-ket-rannet.

Neb-ia-d'ar-gommunion
Gant-ar-pec'hed-n'he-galon
A-gemer-skouer-var-Judaz,
Hag-a-ra-eun-torfed-braz.

Mes, pa-vez, araok-tostat,
Ar-goustianz-e-stad-vad,
Unanet-gant-Hor-Zalver
Guir-eurusted-e-kaver.

Meulomp, karomp, adoromp
Eun-Doue-ker-mad-ouzomp.
Red-oc'hoñjal-dreist-pep-tra
En-he-zonezoun-gaera.

Jezuz-oc'ho-roue-braz ;
Adorit-ben-var-he-groaz,
Hag-en-Ee, hag-e-myster
Sakramant-sakr-an-Aoter.

KANTIK AN OFEREN

Ton : *O Kaloun Zakr, pe : Euz a vremen.*

DISKAN :

*Kinnigomp holl ar Zakrifis,
Gant hor mamm zantel an Iliz,
Sakrifis divin Hor Zalver,
En em ginnig var an Aoter.*

1. E sakrifis an oferen,
Jezuz a ra d'he veleien
Nevezi 'n eun doare dispar
Sakrifis braz Menez Kalvar.
2. An Oferen !... *Pebez tenzor!*
Dreizhi Doue a gav henor ;
Dreizhi e teu d'hon enëou
Bennoz Doue gant he c'hrassou.
3. Va Doue, deoc'h e kinnigan
Gant resped an oferen-man,
D'hoc'h adori : da ziskleria
Ez oc'h hor Mestr, ha Mestr peb tra.
4. Ouzpenn, 'vit ho *trugarekât*
Da veza 'n hor c'henver ken mad :
Holl diganeoc'h hon euz bemdez
Madoberou, grassou nevez.
5. Siouaz ! 'n hor huez tremenet,
Omp kouezet mil guech er pec'hed ;
Jezuz, dre verit ho poaniou,
Pardouit deomp hor pec'hejou.
6. Dre an oferen-ma ive,
Plijet ganeoc'h, o va Doue,
Pa 'z eo ken paour hon enëou,
Rei deomp aluzen ho krassou.
7. Kinnig a reomp an oferen,
'Vit ezomq ar bed kristen ;
Mes, evit *tud ar barrez-ma*
E fell deomp pedi dreist peb tra.

8. Dre nerz ar zakrifis santel,
Ra vo diouzomp kasset pell
Al leoudouet, ar gassouni,
Ar pec'hed vil, ar vesventi.
9. Ouz an Anaoun, o va Jezuz,
Grit ive eur zell truezuz ;
Ha varnho lakit da ziskan
Ho koad sakr evel eur c'hlizen.
10. Ra vo heb dale diboaniet
Hor c'herent hag hor mignouned ;
Roit dezho, dre an oferen,
Ar peoc'h a bado da viken.
11. Guerc'hez Vari, va Mamm garet,
E harz ar groaz ken glac'harat,
Va zikourit da skriva doun
Pemp gouli Jezuz em c'haloun.
12. Ha c'houi, holl Zænt ha Sæntezed,
Ha c'houi, holl elez benniget,
Deomp holl roit skoazel ho peden
Da glevet mad an oferen.

KANTIK DA ZANT JOZEPH

Var don : *Guerc'hez sakr.*

*Sant Jozeph, o patron benniget,
E kreiz hon trubuilhou, ni c'houlen ho skoazel.
Difennit, ni ho ped, hor bro muia-karet ; } bis.
Difennit an Iliz santel.*

Hirio 'n hor bro an drouk-sperejou
A zo evel dichadennet.
En ho enep, euz lein an envou,
Ganeoc'h ra vezimp difennet.
D'an Iliz sakr ha d'he mere'h
Satan a ra eur brezel kriz. [hena
Hor bro e karfe digristena,
'Vit essoc'h diskar an Iliz.
Guechall ho peuz, enep Herodez,
Laket Jezuz e savete.

Hirio, gant ar memez madelez,
Diouallit mad Iliz Doue.
Gevier ha breinadurez heuzuz
A bep tu deomp en em astenn.
Dioe'h ho bilim, Tad karantezuz,
O ni ho ped, deuit d'hon difenn.
Reit deomp hepred ho skoazel ner-
Da yeva e guir gristenien, [uz,
Da gaout veldoc'h eur maro euruz,
Hag ar baradoz da viken.

KANTIK AR ZILVIDIGEZ

Ton : *D'hor Mamm Santez Anna.*

*O Mari, o Mamm vad,
Grit deomp kompren eroad
Eo ar zilvidigez
Affer vraz hor buez.*

Savetei hon ene
Eo al labour kenta
Merket deomp gant Doue
Da ober er bed-ma.

Peb himi n'hen deuz bet
Met eun ene ebken ;
Eur vech nnan kollët,
Rapari n'heller ken.

D'in-me petra dälfe
Kaout madou ar bed-holl,
Ma zaffe, da c'houde,
Va ene paour da goll ?

Talvout 'ra hon ene
Dreist an acur, ar perlez ;
Peb ene d'eun Doue
Zo koustet he vuez !

O pegen diskiant
Ha pegen didalvez
Eo an den dizeblant
Ouz he zilvidigez !

Pa deuto ar maro,
Dioç'htu vezimp barnet ;
Hon ene 'vit ato
Vo salvet pe zaonet.

Hirio e c'hellomp choaz
An ifern pe an Ee ;
Re zivezad varc'hoaz
E vezo marteze.

Chench a rankan hirio,
Heb dale tamm ebet.
Ah ! kousto pe gousto
'Fell d'in beza salvet !

KANTIK SANT IZIDOR

Patroun al Labourerien douar.

Var don : *Kelven, pe : Breuriez ar Feiz.*

*Sant Izidor benniget, patroun al labourer,
Ra vo meulet hoc'h hano dre holl, e peb amzer ;
Al labourerien douar a c'houlen ho pennoz,
Ma vint ganoc'h sikouret da vont d'ar baradoz.*

Izidor a oa ganet e Spagn, en eur gær vraz (1),
Hag eno a-vihanik vel eur zant e vevas.

(1) E Madrid, kær gapital bro Spagn.

Bet hen doa digant Doue kerent mad ha santel
Aketuz da zoursial euz ene ho bugel.

P'e deut en oad Izidor da c'hounit he vara,
Da di eun den pinyidik ez a da zervicha ;
He vestr, hanvet Yann Vergas, hen doa kalz douarou,
Ha ganthan e oue karget da ren al labourou.

Euruz ar penn-tiegez, pa c'hell fiziout peb tra
En dud a rank da gemer 'n he di da zervicha.
Euruz ar zervicherien a gav tiez kristen
Lec'h ma ve lezen Doue heuillet a benn da benn.

Bep mintin, sant Izidor oa fidel d'he beden ;
Bemdez zoken oa kustum da vont d'an oferen ;
He holl zevosionou vije achu abred,
Hag euz labour he zevez ne reant gaou ebet.

Daoust ma oa en he labour ar Zant direbech kaer,
Guall deodou hen tamallas divarbenn koll amzer ;
He vestr hen dije kredet, panefed ma plijas
Gant Doue, d'hen didrompla, ober eur burzud braz.

Mestr Izidor, eun devez, da c'hout ar virione,
A ia var he zouarou da ober eur bale.
Guelet 'ra he zervicher kreiz eur park oc'h arat,
Gant daou El guenn 'n he gichen, daou El o-labourat !

Liez a vech, don Doue a reas burzudou,
Evit lakat da bara muioc'h he vertuziou ;
Eur vech, gant beg he c'harzou, 'n eur skei var an douar,
Ar Zant lakas da zevel eun eienen dispar.

Meur a vech all, d'he vignoun Doue rentas honor :
Diou vech ar boued a greskas dre beden Izidor ;
Ar Zant a oa he galoun ker mad euz ar beorien
Ma kave gras ho guelet, ha rei d'e aluzen.

Ni labourerien douar, evel hor patroun ker,
Hervez bolontez Doue, implijomp hon amzer ;
Pedi, gouzanv, labourat, rei sikour d'an dud kez,
Eo merk ar vuez kristen, guir hent ar zantelez.

KANTIK EN HENOR D'AN DRINDED

Var don : *Guir vugale ar Verc'hez.* (N^o 67 bis.)

DISKAN :

*Deoc'h-hu, o Trinded santel, zo eur memez Doue,
Gloar, henor e peb amzer hag en eternité.
Ni zalc'ho d'hoc'h henori, evel hon tadou koz,
Ha, gant ho kras, ni heuillo guir hent ar baradoz.*

1. DOUE AN TAD evidomp, gant he c'halloud dispar,
Euz a netra 'neuz krouet an Ee hag an douar.
Ni zo bet krouet ive gant he zorn gallouduz,
Krouet 'vit beza ganthan en Ee hepred euzuz.
2. Ra vo meulet da viken hor C'hroner hag hon Tad,
A implij he holl-c'halloud evit hor brassa mad.
Ra vo meulet en envout gant ar zent, an Ele,
Ha meulet var an douar ganeomp he vugale.
3. DOUE AR MAB 'n hor c'henver 'neuz ken braz madelez
Ma tiskan euz an envout 'vit hor zilvidigez.
Gant an dud hen deuz bevet ; evitho, ouz ar groaz,
Eo plijet ganthan mervel e kreiz tourmanchou braz.
4. O Mab-Doue inkarnet, p'e guir ez oc'h ken mad,
Petra hellin-me ober 'vit ho trugarekât ?
Me roi deoc'h ma bolonte, da viret ho lezen,
Me roi deoc'h ma holl galon, d'ho karet da viken.
5. DOUE AR SPERED SANTEL, Doue a garante,
Bemde var hon eneoù a skuill grassou neve.
Gant he c'hraçou e labour da sklerât hor spered,
Ha da lakât 'n hor c'halon eur garante barfet.
6. Lakât a reomp hor fianz ennoç'h, Spered santel,
Kemerit truez ouzomp ha bezit hor skoazel.
Braz eo hor zempladurez ha krenv hon enebour.
Trec'h e vezimp koulz koude, pa zeout d'hor zikour.

KANTIK SANT LAURANS

Var don : *Ar voyen d'en em assuri.*

DISKAN :

*Sant Laurans, merzer gallouduz,
Evidomp pedit bemde,
Ma vezimp tud a faiz nerzuz,
Guir vignoned da Zoue.*

Sant Laurans ar merzer brudet
Hen doa kerent vèrtuzuz,
Hag abred dezhan oue desket
Anaout ha karet Jezuz.

'Vit an tadou hag ar mammou,
Sant Laurans, pedit Doue,
Ma c'hellint varzu an envou.
Hench a mad ho bugale.

A Vro-Spagn ez oa gimidik,
Mes eno ne oue ket pell.
Ar Zant a ieas yaouankik
Bete Rom, ar gær zantel.

E kær Rom, brud hé barfeted
En em skign e berr amzer ;
Eno gant ar Pab eo choazet
Ha græt Avieler.

Pa ia, dre urz Valerien,
D'ar maro ar Pab santel,
Evel dhan hag en he gichen
Sant Laurans 'garfe mervel.

«C'houi am heuillo 'benn tri devez,»
Eme Sixt d'he vab karet,
'Benn tri devez, e guirionez,
Sant Laurans oue merzeriet.

Dispennet eo he izili
Dre zaoutarn ar vourevien ;
He gorf 'n'eo nemet eur gouli
Euz an treid beteg ar penn.

Var eur c'hrill astennet goude,
Dindannhan oue c'houezet tan,
Mes, kennerzet gant grass Doue,
Sant Laurans ne reas van.

Deskomp, o velet Sant Laurans
Ken gouzanvuz 'n he boaniou,
Deskomp kaout kourach ha fianz
En eur zougen hor c'hiroasiou.

Ar Zant, goude poaniou skrijuz,
A varv hag a zav d'an Ec.
Noz-deiz eno dirag Jezuz
E ped 'vit he vugale.

Deuz ar gwent, an drouk izili
Sant Laurans a ve pedet.
Neb a zeu devot d'he bedi
A ve ganthan selaouët.

Diouz peb drouk plijet hon diouall,
O Sant Laurans beniget ;
Diouz ar pec'hed ispisial
Ra vezimp ato miret.

Hor zikourit, dre ho peden,
Da vale var ho roudou,
'Vit ma hellimp en ho kichen
Pignat eun deiz d'an envou.

KANTIK SANT HERBOT

Var don : *Breuzier ar Feiz.*

DISKAN :

*O Sant Herbot, ken karet
En hôr bro Breiz Izel,
Davedoc'h omp diredet
Da c'houlen ho skoazel.
Goulennit bennoz Doue
Deomp holl ha d'hon tiêr,
Ha bennoz Doue ive
D'al lônéd, d'ar c'hreier.*

Euz Bro-Zôz oa gimidik
An Añtrou Sant Herbot ;
He gerent, tud pinvidik,
Oa ive tud devot.
Dre ho c'henteliou santel
Ha skoueriou ho buez,
E lakejont ho bugel
Var hent ar zantelez.

Ar Zant, en he yaouankiz,
A jomas 'pur bepred ;
Ne ziskoueze 'met dispriz
'Vit follentez ar bed.
O na kaera vertuziou
Dirazomp a vleunio,
Pa vo heuillet he skoueriou
Gant tud yaouank hor bro !

Skerijennet gant Doue
Ha nerzet gant he c'hrass,
Sant Herbot 'zeu heb dale
En tu-ma d'ar mor braz.
'Vit brassa mad hon tadou
E teu var zouar Breiz ;
He gomzou, he vuzudou
A gresk enno ar feiz.

Demdost d'ar mor e vevas
Eur pennadik amzer,
Mes he vrud en em skignas,
Hag hen da jench karter.
Mont 'ra da guzet neuze
E goueled eur c'hoat braz.
Bez' eo eno, heb dale,
Brudetoc'h 'vit biskoaz.

Tud klav a zeu d'he lochen
Hag a zistro pare ;
Tud goasket gant an anken
A gav peoc'h an ene.
Mar deo mestr var bep klenvéd,
N'eo ket varno hebken ;
Outhan e sent al lônéd,
Al lônéd goue zoken.

Gant Doue holl-c'hallouduz
D'ar Zant eo bet miret
He c'halloud ken burzuduz
'Var an anevaled.
Setu perag e peder
Sant Herbot beniget,
Evit pellât peb danjer,
Peb drouk diouz al lônéd.

Pa glev ar Zant goulenno
Gret evit lônéd mud,
Guelloc'h e klev pedennou
Gret dezhan 'vit an dud.
Sant karet, hon diouallit
Dreist holl diouz ar pec'hed
Ha dre an dorn hor c'hassit
Da vro an eurusted.

KANTIK ITRON VARIA AR MOR

Var don *Rumengol pe Beg ar Raz.*

*Guerc'hez, Rouanez an Arvor,
Roi ho pennoz d'an dud a vor !
Pedit, pedit ho Mab Jezuz
Da veza onzomp truezuz.*

Hor micher-ni a zo heñvel
Ouz micher goz an Ebestel ;
Ni eveldho a rank poania
Er mor da c'honit hor bara.

Choazet hon euz eur goal labour ;
Nag a zanjeriou var an dour !
Mes gant ar Verc'hez benniget
En danjer e vimp diouallet.

Pa 'z omp tolet ha distolet
Dre nerz avelou dirollet,
Beillit varnomp, o Mamm dener,
Hon diouallit diouz ar reier.

Goulen a reomp ive, Guerc'hez,
Ma teui da vad ar beskerez,
Ma c'hellimp divar hon labour,
Digas d'hon tud eun taim sikour.

'Vit plijout d'ho kalon a vamm,
Ni ho pugale vo divlamm ;
En hon touëz grit ne vo mui
Na labour sul, na mesventi.

Bemdez e larimp hor peden,
Bep sul e klevimp oferen,
Ha morse ne jomimp re-bell
Heb tostât ouz an dol zantel.

Pa zeui hon devez diveza,
Ni ho ped, Itron Varia,
Deut da sturia hon enieou
Betek porz euriz an Envou.

KANTIK EN HENOR DA ZANTEZ ANNA

Var don : *D'hor Mamm Santez Anna.*

*Kristenien Breiz Izel,
Meulomp holl, en deiz-ma,
Hor Patronez-santel,
Hor Mamm Santez Anna.*

E kalôn peb Breizad
Doun e kaver skrivet
Hano dous ar Vamm vad
A gar ar Vretoned.

Ganthi eo bet ganet
Ar Verc'hez Mamm Doue,
Ha, dre-ze, eo savet
D'eur renk huel en Ee.

He galloud a zo bras,
He madelez ive ;
Ne zisprijas biskoaz
Peden he bugale.

Soudarded, moracrien,
Araok mont eiz ar ger,
Diganthi a c'houlen
Ho diouall en danjer.

Ar vamm gristen he fed
Evit he bugale,
Ma vint fidel hepred
Da heuill lezen Doue.

Dalc'hmad ar Vretoned
En ho foaniou brassa
A zavas ho spered
Varzu Santez Anna.

Hirio zo ezom braz
Da c'houlen he skoazel,
Rag a bep tu, siouaz !
Ne veler 'met brezel.

Er barrez, ni ho ped,
Lakit peoc'h, union ;
Kreskit ennhi hepred
Ar gwir devoision.

Itron Santez Anna,
Hor mirit deiz ha noz,
Ha dalc'hit d'hon hencha
Varzu ar baradoz.

KANTIK AR PLAC'H EURUZ JEANN D'ARK

Var don : *Kelven*, pe : *Breuziezh ar Feiz*.

DISKAN :

*Beteg ho trôn en envou, o Jeann, honor bro Franz,
E kassomp holl hor peden gant feiz ha gant fizianz ;
Enebourien an Iliz a zav huel ho fenn,
En ho enep deut buhan, deut buhan d'hon difenn.*

O Jeann, en ho yaouankiz, pebez tristidigez
A zantit var hoc'h ene, pa zonjit 'n hor bro gez !
Beuzet eo ho taoulagad ; fraillet eo ho kalon,
O velet hor bro garet dindan treid ar Zaozon.

O Jeann, sec'hit ho taelou. Sellit varzu an Ee ;
Ac'hano e teui sikour ; dont a rai heb dale.
Bro Franz a vo dilivret gant eur plac'hik dister...
C'houi eo. Stagit d'al labour. Arabad koll amzer.

O Jeann, deut eo evidoc'h an amzer da guitaat
Ar re a garit kement : breudeur, ha mamm ha tad.
Daoust d'ho rann galoun, sentit ouz ho « Moueziou » santel ;
Ar Franz, en he angoni, a c'houlen ho skoazel.

O Jeann, nag a varzudou a ra dreizoc'h Doue !
Ho par, da ren eur brezel, ne oue gulet morse.
Arme ar Zaozon, hodet en dro da Orlean,
Ouzoc'h ne c'hell ket herzel ; tec'het a rank buhan.

O Jeann, goude Orlean, e trec'hit e lec'h all,
Hag enep deoc'h e klever ar Zaozon o yudal ;
Més, en despet d'ar gounnar a verv en ho c'halon,
Charlez seiz a zo sakret ; start'eat eo he drôn.

O Jeann, al labour dispar ho peuz graet beteg-henn.
A dlefe tenna bennoz, mill bennoz var ho penn.
Més siouaz ! petra veler ?... Heb dale-oc'h guerzet,
Taolet 'n eur prizoun heuzuz ha d'ar maro barnet.

O Jeann, daoust m'ho peuz ato bevet 'vel eur zantez,
Kredet zo bet koulzkoude kaout abek 'n ho puez.
Gant eur barnet digaloun touellet gant Satan,
Oc'h kondaonet da vervel, da vervel 'kreiz an tan.

O Jeann, setu an tantad a dle hor merzeria.
Strakal a ra ar flammou ha prest int d'ho mouga.
Diou vech c'hoaz hano Jezuz a gouez euz ho kinou...
Vel eur goulmilk, hoc'h ene a nij prim d'an envou.

O Jeann, euz barr an envou ; taolit breman eur zell
Ouz ar vro ho peuz karet, karet betek mervel.
Dre ho skouer hag ho peden, roit nerz ha fizianz
D'an dud leal a labour da zavetei bro Franz.

KENTELIOU AR GROAZ

Var don : *D'hor Mamm Santez Anna.*

DISKAN :

*Kanomp holl, kristenien,
Kanomp a vouez huel :
Breman ha da viken
Henor d'ar Groaz santel !*

Bepred, elec'h ma vo
Dirazhan Kroaz Jezuz,
Eur c'hristen a gavo
Kentelioù talvouduz.

Kroaz an tour.

Divar beg an touriou
Ar Groaz lavar dalc'hmad :
« Kristenien, d'an envou
Savit ho taoulagad ! »

Kroaz an hent.

Ar Groaz var an henchou
Lavar d'an tremener :
« Guir hent bro an envou
Eo hent Kroaz Hor Zalver. »

Kroaz an ti.

Dirag holl dud an ti,
Ar Groaz ouz ar voger
A zesk da bep hini
Derc'hel mad d'he zever.

Deski 'ra d'ar bugel
Beza bepred sentuz ;
Senti betek mervel
Zo bet buez Jezuz.

D'an tadou ha mammon
E lavar Hor Zalver :
« Beillit var eneou
Emeuz prenet ken ker ! »

Kroaz an ti d'ar c'hlanvour
Zo ive presiu ;
Ennhi e kav sikour
Da veza gouzanvuz.

Kroaz ar gador-govez.

Kroaz ar gador-govez
A ro keuz d'ar pec'her.
Bet eo ken didruet
E kenver he Zalver !

Kroaz ar beziou.

Ar Groaz var ar beziou
He deuz eun nerz dispar
D'ober d'ar c'halonou
Dougen pouez ar glac'har.

Kroaz an aod.

Ar Groaz, pa ve savet
E kichenik an aod,
A ro fizianz bepred
D'ar paour kez martolod.

Kroaz ar varn diveza.

Pa zeui, da fin ar bed,
Jezuz evel barnier,
He Groaz a vo guelec
O lugerni en ær.
En eur velet ar Groaz
An dud fall a greno ;
An dud vad gant joa vraz
Er c'hontrol a drido.

Grit deomp, Salver Jezuz,
Dre verit ho poaniou,
Gant an-holl dud euruz
Mont neuze d'an envou.

HENT AR GROAZ

Dirag an Aoter vraz hag en eur gutât pep stasion.

Var don : *Au sang qu'un Dieu va répandre.*

*Heuillomp holl, heuillomp a spered
Jezuz beteg ar C'halvar ;
Sonjomp en he boaniou kalet,
Sonjomp enno gant glac'har.
O Salver leun a garantez,
Dre ho kroaz hag ho poaniou,
Grit ouzomp eur zell a druez,
Pardounit hor pec'hejou.*

STASION GENTA. — *Jezuz kondaonet d'ar maro.*

O Jezuz va Zalver, me eo emeuz tennet varnoc'h dre va
fec'hejou an holl boaniou a c'houzanvit. Me eo, siouaz ! ar
penn kaoz, ma 'z oc'h bet kondaonet d'ar maro. Roit d'in ar
c'hrass da gaout eur guir geuz d'am pec'hejou, ha da rapari an
dismeganz emeuz great deoc'h. Evit ober pinijen, e fell d'in,
divar vremen, digemeret ar maro, hag ar seurt maro a garot
choaz evidoun.

*Pater, Ave, Gloria, Miserere nostri, Fidelium, Sancta Mater istud
agas.*

EIL STASION. — *Jezuz sammel euz he groaz.*

O Jezuz, hervez ho kelennadurez : Piou benag hen deuz
c'hoant da vont d'hoc'h heul, a die en em zilezel he-unan ha
dougen bemdez he groaz. Dirag komzou ken freaz n'euz ket da
varc'hata. Kousto pe gousto, red eo d'in digemeret ar c'hroa-
sion, da lavaret eo ar poaniou hag an trubuillou a gavin var
hent ar vuez. Va zikourit, me ho ped, da zougen anezho a
galoun vad dre garantez evidoc'h.

TREDE STASION. — *Jezuz o koueza dindan he groaz.*

O Jezuz, ken dinerzet en em gavit, ha ken pounner eo ive ar
neac'h ho peuz da zougen ma kouezit d'an douar. Heb dale
avad e savit a-nevez gant nerz-katoun.

Pa gouezan, siouaz d'in ! en eur pec'hed benag, grit d'in beza
kourachuz avoalc'h evit sevel buhan dre eur guir binijen. Ha,

da c'houde, kennerzit va bolontez, evit miret na vefen trec'het adarre gant ar memez tentasionou.

PEDERVED STASION. — Jezuz a zigouez gant he Vamm santel.

O Mari, Mamm dener, Jezuz ho Mab muia-karet a dremen dirazoc'h en eur stad truezuz meurhed. He velet a rit goalgasset gant he vourrevien, ha beac'h ganthan o tougen eur groaz pounner ha mezuz. O pebez rann-galoun evidoc'h hag evit Jezuz he-unan ! Dre bec'hejou va buez oun bet kaoz da boaniou ho Mab, ha kaoz ive d'ho poaniou. Pardoun a c'houlennan a greiz va c'haloun da veza bet ken didruez en ho kenver.

PEMPED STASION. — Simon ar Syreneen a zikour Jezuz da zougen he groaz.

O Jezuz, Simon Syreneen a ro deoc'h eun tamm skoazel da zougen ho kroaz. Plijet ganeoc'h ober kement all evidoun, ken aliez guech ma zeu eur boan benag da boueza varnoun. Gant oun na gollen kouraj, harpit neuze va zempladurez, en eur asten d'in ho tourn gallouduz.

Ha ma velan va nessa er boan hag en drubuill, ne jomin ket diezblant en he genver. Hervez va galloud, e sikourin anezhan da zougen he groaz ha da zantellat he boaniou.

C'HEUC'HVED STASION. — Ar Veronik santel a zec'h he vizaj da Jezuz.

O Jezuz, ar Veronik, heb aoun ebet, a ia betek ennoc'h a dreuz ar zoudarded a zo en dro deoc'h. Sec'ha 'ra gant eul lien ho pizaj goloet a c'houezen hag a voad. Var ar lien-ze, dre eur burzud, e oue merket ganeoc'h skeuden ho pizaj santel.

Egiz ar Veronik, ra vezin dispounj bepred dirag hoc'h enebourien. Karout a rafen ive rapari an dismeganz great deoc'h dre ar blasphemou. O va Zalver, sikourit ac'hanoun da verka em ene ho vertuziou divin, ma teuin muioc'h-mui da veza henvel ouzoc'h.

SEIZVED STASION. — Jezuz a gouez evit an eil guech.

O Jezuz, pa gouezit d'an douar evit an eil guech, e c'houzanvit poaniou braz. Ho gouzanv a rit evidoun, abalamour ma 'z oun bet koezet aliez er memez pec'hejou. Eur c'heuz braz emeuz dezho, ha, divar vrema, e vezin var evez. Guelloc'h e fionallin diouz kement a c'helfe va lakat adarre da goueza er

pec'hed. Gouzout mad a ran pere eo ar pec'hejou e kouezan enno aliessoc'h. Diouz ar re-ze dreist holl e fell d'in poania d'en em ziouall en amzer da zont.

EIZVED STASION. — Jezuz o konsoli merc'hed Jeruzalem.

O va Jezuz, klevet a ran ac'hanoc'h o lavaret d'eun nebeut merc'hed euz Jeruzalem : « Na ouelit ket varnoun-me ; goueit kentoc'h varnoc'h hoc'h-unan ha var ho pugale »

Me ive, me va-unan a dilefe skuilla daelou c'houero, abalamour d'am fec'hejou tremenet. Ra zeuio da viana ar zonz anezho da ranna va c'haloun gant eur gair glac'har.

Da verc'hed Jeruzalem e lavarec'h ouzpenenn peger spountuz eo mervel e stad a bec'hed. Henvel ouz ar c'hoat sec'h, an den a varv er stad-se a zo strinket raklat, gant justiz ar Barner, e kreiz tan an ifern. O va Zalver, pa rankin mont euz ar bed-man, na bermettit ket e ve neuze va ene paour dizec'het gant ar pec'hed.

NAVED STASION. — Jezuz a gouez evit an trede guech.

O Jezuz, evit an trede guech, setu c'houi koezet adarre didan ho kroaz. Ne veler ket ac'hanoc'h koulzkoude o fallgalouni. Sevel a rit c'hoaz eur vech ; sevel a rit heb dale tamm, evit kerzet a-nevez var hent ar C'halvar.

Ho skoueriu santel a ro sklerijen d'am ene. Koumpren a ran guelloc'h e tle an den, eur vech koezet er pec'hed, en em denna buhan euz eur stad ken noazuz ha ken danjeruz. Koumpren a ran ive ne dleer morse dizizout euz ho trugarez, n'euz forz pegen-aliez e vezer koezet er memez pec'hejou.

DEKVED STASION. — Jezuz divisket gant he vourrevien.

O va Jezuz, guelet a ran ho pourrevien didruez o tiframma ho tiltad diganoc'h. Gouliou ho korf sakr 'zo digoret a-nevez, hag, euz hoc'h holl izili, ar goad a red adarre muioc'h eget biskoaz. Poanussoc'h e kavit c'hoaz an dismeganz a bouez varnoc'h, pa 'z oc'h divisket dirag an holl.

Dre ar boan ho peuz neuze gouzanvet en ho korf hag en hoc'h ene, roit d'in ar c'hrass da gaout ato heuz ha donjer ouz an holl bec'hejou mezuz.

UNNEKVED STASION. — Jezuz staget ouz ar groaz.

O Jezuz, n'euz den ebet evit koumpren peger klet eo ho poaniou, pa 'z eo staget ho korf sakr ouz ar groaz. Eun druez

eo klevet an taoliou morzola a blant tachou braz en ho taouarn hag en ho treid ; eun druez ive ho kulet, savet en aër, ha dal-c'het eno var bouez ar pevar gouli great deoc'h gant an tachou. Setu aze al labour milliget emeuz great dre va fec'hejou. Keuz emeuz dezho ha pardoun a c'houlennan dre verit ho poaniou.

DAOUZEKVED STASION. — Jezuz a varo var ar groaz.

O Jezuz, mil bennoz deoc'h da veza gouzanvet eur maro kriz evit silvidigez va ene. Anez ho madelez hag ho trugarez heb muzul, e oan kollet da viken.

Divar vrema, beteg fin va buez, e talc'hin da ziskouez deoc'h karantez evit karantez, ha da veza bepred anaoudek en ho kenver. P'e guir ez oc'h maro evidoun, e rankan da viana beva evidoc'h, en eur lakât e pep tra va bolontez a-unan gant hoc'h hini.

TRIZEKVED STASION. — Jezuz diskennet euz ar groaz ha lakeat etre divrec'h he Vamm zantel.

O Guerc'hez santel, o Mamm glac'haret, anzao a ran ez oun bet kriz ha dinatur e kenver ho Mab, hag en ho kenver hoc'h-unan. Ma n'euz breman etre ho tivrec'h nemet eur c'horf maro, dispennet a hep tu ha ruziet gant ar goad, me eo, siouaz d'in ! me eo a zo kaoz.

O Mari, plijet ganeoc'h koulzkoude ober eur zell a drugarez var va ene paour. Pardounit d'in an torfed heuzuz emeuz great, pa 'm euz lakeat ho Mab muia-karet d'ar maro. Goulennit digant-han, me ho ped, ma roio d'in ar pardoun euz va holl bec'hejou. Va zikourit ive da skriva doun em ene poaniou he Bassion.

PEVARZEKVED STASION. — Jezuz lakeat er bez.

O va Jezuz, gant daou euz ho tiskibien ez eo lianet ho korf santel. Ganho ive eo douget beteg ar bez, ha lakeat eno gant kalz a garantez hag a resped.

Pa blijo ganeoc'h disken em c'haloun dre ar gommunion, ho pet ar vadelez d'am zikour, ma c'hellin ho reseo e stad vad. Grit m'ho resevin bepred gant feiz, gant resped ha guir garantez. En doare-ze, oun sur e teuio da vir ar goulen great evidoun gant ar belek, pa ro d'in ar gommunion : ho korf sakr a ziouallo va ene beteg ar vuez a bado da viken.

Induljanz ar Maro mad.

Hon Tad Santel ar Pab hen deuz bet ar vadelez da lakat Induljanz braz ar maro mad kalz assoch da c'hounit. Peb hini a c'hello breman gounit an Induljanz-se epad zoken ma vezo c'hoaz var he yec'hed, hag e talvezo dezhan a henn ma rento he ene da Zoue. N'euz ken d'ober nemet mont da goyez ha da gommunia (d'an deiz ma kare) ha goude beza kominuñtel kana pe lavaret devot ar beden-ma.

Ton : *Elez-euz ar baradoz.*

O va Aotrou, va Doue, n'euz forz pe seurt maro
A garot choaz evidoun, me fell d'in-hen reseo ;
Euz ho tourm, a greiz kaloun, m'en reseo a-vrema,
Gant holl anken ha poaniou va-amzer diveza.

TOLEN

1.	Kantik en honor d'ar Zakramant	1
2.	Kantik an Oferen	2
3.	Kantik da Zant Jozeph	3
4.	Kantik ar Zilvidigez	4
5.	Kantik Sant Izidor	4
6.	Kantik en honor d'an Dinded	6
7.	Kantik Sant Laurans	7
8.	Kantik Sant Herbot	8
9.	Kantik Itron Varia ar Mor	9
10.	Kantik en honor da Zantez Anna	9
11.	Kantik ar Plac'h auzus Jehan d'Arh	10
12.	Kentelioù ar Groaz	12
13.	Hent ar Groaz	13

Imprimatur :

Corisopita die 7 Febr. 1912.

A. GADON, O. S. B.



AN ILLUSTRATION OF THE VENERABLE FATHER

MISSIONARY OF THE SOCIETY OF THE SACRAMENTS, AND OF THE
MISSESSIPPI VALLEY, WHO ARRIVED IN THE YEAR
1675, AND REMAINED IN THE COUNTRY UNTIL HIS DEATH
IN THE YEAR 1700. HIS NAME WAS FATHER JACQUES
D'ALOU, OF THE ORDER OF THE SACRAMENTS, AND HE WAS
BORN IN FRANCE IN THE YEAR 1640. HE WAS
A MEMBER OF THE SOCIETY OF THE SACRAMENTS, AND
HE WAS A MEMBER OF THE SOCIETY OF THE SACRAMENTS.